

Y. MADEC, Persoun Trelevenez



JEANN D'ARC

Myster e tri Arvest



— BREST —

MOULLEREZ AR « CHOURRIER »

1906

Académie Bretonne


55 D

Y. MADEC, *Persoun Trelevenez*



JEANN D'ARC

Myster e tri Arvest



— BREST —

MOÛLLEREZ AR « C'HOURRIER »

1906



Ar Myster-ma en deuz bet ar gurunen genta,
evit ar Mysteriou brezounek, e kenstrivadeg
Kevredigez Breiz.

(GUENGOLO 1906).


A Monsieur le Recteur de Tréflévenez.

MONSIEUR LE RECTEUR,

J'ai lu avec beaucoup d'intérêt votre
Tragédie de « Jeanne d'Arc », et j'en ai
rendu compte à Monseigneur l'Evêque.
Nous n'y avons rien trouvé qui puisse en
empêcher l'impression.

Quimper, ce 3 mars 1906.

CORRIGOU,
Vicaire général.



JEANN D'ARC

Myster e tri Arvest

*En Arvest kenta, e velimp Jeann o kas ar
Zaozon divar dro Orleans ;
En eil Arvest, Jeann o lakât rei he gurunen
Roue Frans da Charles VII, e Reims ;
En trede Arvest, Jeann chadennet, er prizoun ;
merzeriet (1) e Rouen.*

Er Myster-ma e veler :

Jeann d'Arc, leshanvet Guerc'hez yaouank
Orleans ;
Charles VII, roue Frans ;
De la Trémouille, mignoun braz ar Roue ;
Lahir, kapiten brudet etouez ar Francizien ;
De Gaucourt, gouarner kear Orleans ;
Gamach, kapiten var eun nebeut soudardet ;
Jackes d'Arc, tad Jeann ;
Durand Laxart, eontr Jeann ;
Job Marc, bourc'hiz Orleans ;
Fransa Marc, mab Job ;
Per ha Paol, goardou ;
Komt de Warwick, gouarner Rouen evit ar
Zaozon ;
Massieu, skrivani, truezuz avechou evit Jeann
d'Arc prizouniet ;
John, William, John Gris, tri goard Saoz
e prizoun Rouen ;
Guennoles, floc'hik.



(1) Pa reomp hano euz a verzerenti Jeann d'Arc, ne ententomp ket diskleria eo bet lakeat d'ar maro evit ar feiz, evel ar verzerien kurunet gant an Iliz ; henvel a reomp he foaniou eur verzerenti, abalamour ar poaniou-ze a zo bet hir ha kriz.

JEANN D'ARC

ARVEST KENTA

Orleans

An divizerien, epad an arvest-ma, a zo var moge-
riou kear Orleans. Guelet a reer, a bell, kastell
krenv an Touriou, d'ar Zaozon.

KENTA DIVIZ

Job Marc, bourc'hiz Orleans, he armou
ganthan, a zo oc'h ober goard.

*Job, d'he vab Fransa a zeu var teur an
theatr, hag a stard dorn he dad*

Laouen oun, va mab, o velet ac'hanout o
tont ganen da zeski ober goard. Seiz miz
so eo kelc'het Orleans, hor c'hear muia
karet, gant soudarded Bro-Zaoz, ugent
mil anezho. Seiz miz so e ran goard, evel ar
vourc'hizien all, pa vez deuet va zro ; mes
eüruz oun hirio, pa velan e vezi dizale
guest da zalc'her va flas ama. Ha kousket
mad ec'h euz en noz-ma ?

FRANSA

Ia, va zad. Choumet ounp pell hag
hir, deac'h d'abardaez, da zelaou ar baotred
yaouank a zo bet e Chinon gant Jeann

d'Arc, hag o deuz diskleriet d'eomp he buez burzuduz. Savetei a rai ar Frans, va zad.

JOB

Guell a ze, mar gra ; mes a berz piou e teu ?

FRANSA

A berz Doue, tad ; merkou e deuz roet euz a gement-se.

JOB

Merkou guirion ? Petra eo bet he buez ?

FRANSA

Jeann d'Arc, ganet e Domremy seitek vloaz a zo brema, a ioa ker fur en he bugaleach ma lavare anezhi he Aotrou Person : « N'euz ket guelloc'h plac'h yaouank eget Jeann er barrez. »

JOB

Eur beleg a zo atao eun den a skiant ; evelato, n'eo ket red mont keit all dioc'h Orleans evit kaout merc'hed yaouank fur, a drugare Doue.

FRANSA

D'he zrizek vloaz e oue galvet gant Doue : gwelet a reaz meur a vech elez en eur sklerijen gaer, ha Sant Mikeal a ziskleriaz d'ezhi e oa galvet gant Doue evit savetei he bro : « Sav, emezhan d'ezhi, » sav, merc'h a galon vraz, ha bale. »

JOB

Ma n'o deuz ket an dud all gwelet an

elez-se, Jeann a c'hell beza bet desevet. Ne deo nemet eur verc'h, hag ar merc'hed o deuz avechou nebeut a benn.

FRANSA

Ar re all n'o deuz ket gwelet an elez ; n'o deuz ket gwelet ken nebeut na Santez Catharin, na Santez Mac'harit roet d'ezhi gant Doue evit he ren en he oll oberou. Mes, ma n'o deuz ket ar re all gwelet ar Zentezed, e deuz anavezet oa Jeann kenteliet gant Doue.

JOB

Kalz merkou e deuz roet ?

FRANSA

Meur a hini, tad. He fasanted a zo bet souezuz. Pa ieaz gant he eontr, Durand Laxart, da gaout Robert de Beaudricourt, gouarner Vaucouleurs, he-man ne reaz da genta nemet disprijout ar verc'h-se : re zouezuz e kave klevet eur plac'h o c'houlou ren soudardet var dachen an emgann.

JOB

E guirionez, ne zonje ket ker fall-ze.

FRANSA

Jeann, e leac'h koll kalon, a lavare : « Ha » pa vefen bet merc'h eur Roue, ha p'am » befe bet kant tad ha kant mam, ha pa » rankfen uza va zreid beteg pennou va » daoulin en eur vale, red mad eo d'in » mont e kreiz ar Frans da gaout ar roue

» yaouank. Hirio, emezhi eun devez, sou-
» dardet ar Frans a zo diskaret pell ac'halen
» gant ar Zaozon. »

JOB

Lavaret a rea sklear aoualc'h an traou.

FRANSA

Ma ! dek devez goude, de Beaudricourt
a c'hellaz gouzout oa guir kement-se.
Neuze, ne argilaz mui, lavaret a reaz da
Jeann : « Kea, ha Doue ra vezo ganez. »

JOB

Ha Jeann a deuaz evelse, he-unan ?

FRANSA

Nan, c'houec'h den a vrezel a ioa ganthi,
hag hi a ioa ive guisket e goaz, rag Moue-
ziou he Sentezed o doa lavaret d'ezhi :
« Laka dillad goaz evit m'o devezo ar
» zoudardet brasoc'h doujans evidot. »

Dout a rejont ho seiz euz a Vau-
couleurs da Chinon eb drouk ebet.

JOB

Neuze, e c'hell beza Doue ganthi, rag eur
c'halz euz ar broiou o deuz treuzet a zo
d'ar Zaozon ; dre-ze e oant bemdez e
riskl da veza anavezet ha paket.

FRANSA

E Chinon e deuz anavezet ar Roue, a
ioa en em guzet etouez tud he lez, ha
diskuliet d'ezhan traou ha ne c'helle den

ho gouzout, traou hag a ioa etre Doue hag
hen ebken. Setu mac'h anzavaz Charles :
« E guirionez, a berz Doue e teuit. »

JOB

Ia, neuze, e tle dont a berz Doue.

FRANSA

Kerkent e deuz great ober he banniel,
hag evit merka sklear eo euz an env e teui
d'comp ar gounit, e deuz lakeat var he
banniel hanoiou Jesus ha Mari ; he
c'hleze a zo bet kavet dre vuzud, var he
lavarou d'ezhi, e kichen an aoter, en
iliz Santez Catharin e Fierbois.

JOB

Ia, e guirionez, a berz Doue eo e teu.

FRANSA

Hag evit tenna varnhi bennoz Doue atao,
e ra d'he oll soudardet beza fur hag honest.
— Mes petra velan ahont, en tu all d'ar
ster ? eun tan goall benag eo e tle beza...

JOB

Ia, guelet a ran eur sklerijen ; mes, petra
eo ?

FRANSA

Kastell bian ar Zaozon, kastell Sant-
Prix, eo a zo o tevi.

JOB

Ha guir e vefe kement-se?...

FRANSA

Oh! tad, ar c'hastell-ze eo; ema dija e ludu.

JOB

Ah! entent a ran. Ar Zaozon o deuz kollet, er zizun-ma, meur a gastell all; ha breman, evit kaout muioc'h a dud da zifenn kastell braz an Touriou, e tevont ar c'hastell bian-ma: acun o deuz razomp. Doue ra vezo meulet!

FRANSA

Tad, hel lavaret a ran d'eoc'h: Jeann a zo ganeomp, ha Doue a zo ganthi.

JOB

Va mab, kredi a ran, mes... ha ne glevez-te ket eun trouz aze?

FRANSA

Eo, tad; guelet a ran zoken unan benag o tostât; rag an deiz a zo o tarza, ha va daoulagad a zo mad. An Aotrou de Gaucourt, gouarner kear, eo e tle beza, var a velan.

JOB

Ha pa vefte de Gaucourt, e tleomp evelato goulenn he c'her; eur goard ne dle morse fiziout er re a vel o tont.

(En eur zével he vouez.)

Piou a zo aze?

EUR VOUÉZ A BELL

Frans-Orleans.

JOB

Tostait neuze.

(Pa zigouez de Gaucourt, Job ha Fransa a ra zalud ar zoudardet, goudeze, ez eont unan a bep tu d'ezhan.)

EIL DIVIZ

DE GAUCOURT, gouarner Orleans;
JOB; FRANSA

DE GAUCOURT

N'ez euz netr' a nevez?

JOB

Nan, Aotrou Gouarner. Var evez e oamp, va mab ha me, ha n'euz bet trouz ebet feno. Guelet on euz bremaik Kastell Sant-Prix o tevi.

DE GAUCOURT

Mad eo, an dra-ze am euz guelet ive.

(Klevet a reer trouz e tal an or; ar gouarner a zav he vouez.)

Piou zo aze?

EUR VOUÉZ

Frans-Orleans.

DE GAUCOURT

Sell! Jeann d'Arc he-unan eo, mar plij ganeoc'h.

JEANN, *guisket e goaz, gant eur vantel vraz ;
starda a ra dourn ar gouarner*

Penaoz ema ar bed ganeoc'h ?

DE GAUCOURT

Mad aoualc'h. Ha c'houi ?

JEANN

Me a zo brao ive.

DE GAUCOURT, *d'ar goardou ne dennont
lagad divar Jeann*

It, c'houi, eun hanter-kant paz benag
a'halenn var ar mogeriou, unan a bep tu.

Entetet eo ?

AN DAOU C'HOARD, *en eur zaludi*
Entetet !

(Hag hi kuit).

TREDE DIVIZ

JEANN D'ARC ; DE GAUCOURT

DE GAUCOURT, *seac'h he c'her :*

Petra rit ama brema, c'houi ?

JEANN

Doue en deuz va digaset evit savetei
kear gristen Orleans, hag e ran eur zell var
an dachen araog an emgann hirio.

DE GAUCOURT

Hirio ! ar zoudardet a joumo er gear da

ziskuiza. Daou voall devez emgann a zo bet
er zizun-ma : dimerc'her ha deac'h. Dimer-
c'her on euz kemeret kastell Sant-Loup, ar
goad en deuz redet, an devez a zo bet tenn.

JEANN

Ar goad en deuz redet, guir eo. Sounna
ra va bleo pa velan goad Frans o ruill.
Ah ! perag ive n'oc'h euz ket va gortozet
dimerc'her, araog staga d'ar Zaozon ?

DE GAUCOURT

Tud aoualc'h oamp, a gave d'in, evit al
labour.

JEANN

Kila oc'h euz ranket abalamour ma ne
oan ket ganeoc'h. Me a zo sempl ha
dister dre natur, mes Doue a zo ganen, ha
va banniel a hencho atao ar Fransizien
var hent ar gounit hag an henor. Hag ar
c'hastell a ioa d'eomp araog an noz.

DE GAUCOURT

Ia, her gouzout a ran, mes ar zoudardet
oc'h euz skuizet. Deac'h on euz bet eun
devez ker goas all : eur c'hastell devet :
hini Sant Ian ; eun all kemeret dre nerz :
hini an Aogustined ; ne c'hellomp ket ken-
derc'hel da labourat evelse.

JEANN

Tri labour braz am euz d'ober a berz
Doue : da genta, savetei Orleans ; d'an eil,
lakât kurunen Jour rouaned Frans var
benn Charles e Reims ; d'an trede, taoler ar

Zaozon er meaz euz hor bro. Kelc'h Orleans
a zo hanter-dorret; red eo peur-ober al
labour.

DE GAUCOURT

Ma ! Neuze grit al labour oc'h-unan.
Lavaret a rit e teuit a berz Doue, ha
Doue a c'hello, pa garo, diskar ar Zaozon
milliget eb zikour an dud.

JEANN

An dud a vrezel a boanio, ha Doue a roi
ar gounid d'ezho.

DE GAUCOURT

Poania a raint divezatoc'h, pa vezo deuet
soudardet all d'hor sikour. Labour aoualc'h
on euz great evit eur pennad mad brema.
(Mont a ra kuit eb sellet ouz Jeann).

PEVARE DIVIZ

JEANN D'ARC, *he-unan*

Oh ! na pegen kalet eo va buez brema !
Var va zro n'euz nemet goazed, hag atao
goazed ; lod tud a galon ha sentuz, lod all
oc'h enebi ouzon. O deveziou eüruz Dom-
remy, e pe leac'h oc'h-hu, tec'het ? Pegen
dizoursi e veven neuze, o tior all va denved,
guech va-unan, guech gant merc'hed
yaouank all ; e leac'h hirio, e kreiz ar zou-
dardet, ne glevan hano nemet euz an em-

gannou, ne velan nemet ar c'hlezeier noaz
hag ar goad o redet.

(Daoulina ra).

O va Doue, pa 'z eo guir e fell d'eoc'h,
me zo ho servicherez ; ho polontez bezet
great. Ha c'houi, sant Mikeal, va difennit
bremaik ; c'houi, santez Catharin ha santez
Mac'harit, deuit d'am zikour evit m'on de-
vezo ar gounit.

(An diou zantez en em ziskouez, kurunet ho diou).

PEMPED DIVIZ

SANTEZ CATHARIN ; SANTEZ MAC'HARIT ;
JEANN

SANTEZ CATHARIN

Bez fizianz, merc'h a galon vraz, bez fi-
zianz ; rag hirio c'hoaz ar gounid a vezo
d'id.

JEANN

Ar zoudardet, var a lavar unan euz ar
vistri braz, a zo skuiz.

SANTEZ CATHARIN

Nerz Doue a zo gantho. Kastell an Tou-
riou a zo huel ha krenv, difennet mad eo
gant ar Zaozon ; er pardaez-ma goulskoude,
e vezo d'eoc'h.

JEANN

En han' Doue, va c'hennerzit em labour.

SANTEZ CATHARIN

Da zikour a raimp, mes hirio c'hoaz, da
c'hoad a redo; goullet e vezi etre da skoaz
ha da c'houzoug, mes bez' fizians evelato.

JEANN

N'em euz ket aon rag ar boan, gant ma
rin va labour, labour Doue.

(Ar Zentezed hag ar sklerijen a ia kuit).

C'HOUEC'HVED DIVIZ

JEANN, *he-unan*

Va zikourit, o va Zalver Jesus ! mall
eo d'in mont da glask va zoudardet. Mes,
piou a zo o tont aze ? Sell ! va floc'hik
Guennole eo.

(Guennole a deu a vel).

SEIZVED DIVIZ

JEANN; GUENNOLE

GUENNOLE

Devez mad d'eoc'h, Jeann.

JEANN

Ha d'id-te ive, Guennole. En em blijout
a rez evel floc'hik ganen ?

GUENNOLE

En em blijout a ran dreist, rag c'houi a
zo eur vestrez vad. Mes... daoust ha mont a
reomp dioc'htu d'ezho, Jeann ?

JEANN

Dioc'htu ? Da biou ?

GUENNOLE

Da biou ? d'ar Zaozon, na petra 'ta !

JEANN

Ia, mont a raimp, kenta ma c'hellimp ;
mes, siouaz ! lod euz ar vistri o deuz c'hoant
chom er gear.

GUENNOLE

D'ober petra ? da granchat el ludu ?

JEANN

Goapaer bian ! Lod a gav diez defaot na
renont ar brezel, ar zoudardet ; ne fell ket
d'ezho plega d'eur verc'h. dont d'am heul.

GUENNOLE

Evidon-me a yelo ganeoc'h, ha pa ve d'ar
penn all d'ar bed e vefe ! Hag ar zoudardet
ho c'heulio ive, bezit dinec'h. Ar vistri braz
zo sotoc'h eget..... eget saout.

JEANN

Evelato, floc'hik, arabat eo d'id komz
evelse euz a vistri braz ar zoudardet.

GUENNOLE

Ar virionez ne lavaran ken. Ar zaout a

zu-ma, pa 'z eont d'ar park, a laosk atao ar renk kenta gant ar memez hini.

JEANN

E leac'h all eo evelse ive, peurliesa.

GUENNOLE

Ar c'hapitened o deuz eur vestrez, eur vestrez hag a deu d'ezho a berz Doue, e deuz bet galloud varnho digant ar roue ; ne fell ket d'ezho heuil anezhi : sotoc'h int eget ar zaout.

JEANN

Floc'hik, re lemm eo da deod, bez muioc'h a zoujans evit ar re vraz. E leac'h chom ama, deomp da glask hon tud evit an emgann.

(Mont a reont kuit ho daou, mes klevet a reer mouez ar floc'hik) :

Sotoc'h eget ar zaout.

EIZVED DIVIZ

JOB MARC ; FRANSA

Dont a reont a vel.

JOB

Setu ni ama adarre.

FRANSA

O tad, n'on devezo ket amzer da inoui hirio, m'em euz entetet mad Jeann : dioc'h

ma lavare en eur vont kuit, e vezo emgann hirio adarre.

JOB

Ra blijo gant Doue e ve diskaret ar Zaozon milliget !

FRANSA

N'euz fors pegen krenv eo kastell an Touriou, Jeann hen diskaro, Jeann her puluc'ho. Netra ne c'hell herzel outhi... Hola ! ne glevit-hu ket eun trouz, tad ?

JOB

Eo, kaout a ra d'in e klevan tud o vale.

FRANSA

An aotrou gouarnner eo, o tont en dro gant ar c'hapiten Lahir ; evit doare, e teuont ama var eün.

JOB

Red eo ober d'ezho kaozeal :
(Krenv) piou zo aze ?

EUR VOUEZ

Frans-Orleans.

JOB

Tostait neuze.

(Ar c'hapitened a deu a vel).

NAVED DIVIZ

DE GAUCOURT ; LAHIR ; GOARDOU

DE GAUCOURT

It unan a bep tu adarre, ha mirit ne vefemp direnket gant den.

(Mont a ra ar goardou kuit, unan a bep tu).

DEKVED DIVIZ

DE GAUCOURT ; LAHIR, kapiten brudet

DE GAUCOURT

Ho kalvet em euz ama, kapiten Lahir, evit ma velfac'h oc'h-unan, eur vech muioc'h, peger krenv eo kastell an Touriou. Gant hor zoudardet skuiz evel ma 'z int, ne c'heller ket dont a benn euz ar c'hastell-ze, a zo difennet mad gant ar Zaozon. Sellit outhan.

LAHIR

Her gullet a ran mad, krenv eo ; mes pa 'z eo guir gant Jeann d'Arc e kemeromp eur c'hastell Saoz pe zaou bemdez, hennez a c'hellfe mont d'an traon, mar deo deuet he dro.

DE GAUCOURT

Mes ne c'heller ket pignat beteg ar Zaozon a zo var ar mogerioù huel-ze.

LAHIR

Evel ma lavar Jeann, ha pa 'z afent da guzat en oabl, e tiskarimp anezho.

DE GAUCOURT

Nan, nan, arabat eo goulenn re digant hor zoudardet. Gounezet on euz deac'h gant nebeut a dud, mes n'on euz ket a asurans da c'hounit ato. En em glevet oump deac'h, ni mistri braz ar zoudardet, evit ehana brema ; ehana raimp.

LAHIR

Guir eo, ar c'hapitened a zo bet a du ganeoc'h deac'h, hag o deuz lavaret ne 'z afent ket d'an emgann nemet pa 'o devezo resevet sikour. Mes me lavar hirio koulz ha deac'h : ma ya Jeann d'an emgann, me heulio anezhi, rag hi ne goll morse. Gouliet eo bet deac'h, ha goulskoude eo choumet d'en em ganna er penn araog beteg m'eo bet kemeret kastell an Aogustined. Eur plac'h dispount eo.

DE GAUCOURT

Evit anzañ ouzoc'h ar virionez penn da benn, e livirin, kapiten : Jeann ne blij ket d'in, abalamour mar bezomp treac'h d'ar Zaozon ganthi, an henor brasa a vezo d'ezhi.

LAHIR

Petra ra ze ? Gant ma vezo diskaret ar Zaozon ha saveteat ar Frans ?

DE GAUCOURT

Ouspenn-ze, Jeann a zo re stris an urz ganthi. Gourc'hemenn a ra d'ar zoudardet koves araog an emgann ; difenn a ra ober skrab var kement a c'heller da gaout en tiez hag er parkeier ; ha goulskoude, ar zoudardet n'eo ket seurezed int.

LAHIR

Me ne gavan ket eaz koves ken nebeut, mes pa 'z eo guir e fell da Jeann ! Ha neuze, ma 'z euz hiniennou o klemm, ar peb brasa, lavaret a c'heller memez an oll zoudardet a zo a du gant Jeann. Ha penaoz e vefent en he enep ? Hi a vev evel eur zantez. Mad eo da goves, da gommunia ha da yun aliez ; beva ra pur ha chast atao.

DE GAUCOURT

An oll devosionou-ze ne roont ket d'comp eur zoudard muioch : ne doump nemet pevar mil : ar Zaozon, eiz dez so, a ioa ugent mil anezho.

LAHIR

Ugent mil ! E c'hell beza guir : mes meur a gant ha meur a vil zoken, a zo bet kaset d'ar bed all en eiz dez-ma.

DE GAUCOURT

Chom a ra kalz c'hoaz. E kastell an Touriou-ez euz goal ganoliou hag a zigas bouliji mein a gant lur bétég ama : kalz tud

a vrezel int er c'hastel-ze, ha p'eo guir on euz bevans evit pell amzer, e c'hedimp...

LAHIR

Jeann eo e deuz great d'ar bevans-se dont e kear.

DE GAUCOURT

Guir eo, mes gant ar bevans-se ni a c'hell herzel pell, ha p'on devezo bet sikour digant ar Roue, e skoimp adarre var ar Zaozon. Da c'hortoz, ne finvimp ket. Mont a ran, var gement-se, pa 'z eo guir oun gouarnar kear, da zifenn na vefte digoret an dorjou da zen ebet hirio.

UNNEKVED DIVIZ

DE GAUCOURT ; LAHIR, GOARDOU

DE GAUCOURT

Goardou ? tostait.

(Ar goardou a deu a vel, unan a bep tu, en eur zaludi).

Taolit evez mad : den-ebet, na soudard, na bourc'hiz, na kapiten ne dle mont er meaz euz kear dre an or a zo aze e kichen. Mont a ran larkoc'h da rei va urziou ; mes dizale e tistroin ama. M'o deuz ar re zo da dosta d'an or izom sikour, c'houi a 'z ai da rei harp d'ezho.

AR GOARDOU

Ia, kapiten.

(De Gaucourt a ia kuit).

(Lahir, tenval he benn, a ya hag a deu eb lavaret grik).

LAHIR

Den yaouank, gouzout a rit e pe leac'h e kavin Jeann d'Arc ?

FRANSA

Bremaik edo aze, gouzout a ran e ra he diskenn e ti ar Boucher, mes n'ouzon ket... Daoust ha n'eo ket hi eo a deu a hont var ar mogeriou ?

LAHIR

Hi eo he-unan. Mes, petra ra d'ar marema var mogeriou kear ? Ah ! entent a ran : Sellet a ra ouz kastell ar Zaozon, evit klask an tu da zont a benn anezhan.

DEKVED DIVIZ

JEANN ; LAHIR ; GOARDOU

(Sellet a reont ouz Jeann).

LAHIR

Devez mad d'eoc'h, Jeann ; eüruz oun oc'h ho kueleit.

JEANN

Ha me ive, laouen oun atao pa velan guir Fransizien a gar Doue hag ho bro.

LAHIR, d'ar goardou

Pellait epad eur pennad, ma komzin gant Jeann.

(Ar goardou a 'z a kuit).

LAHIR

Eun dra am euz da ziskleria d'eoc'h, Jeann ; ar c'hapitened a zo en em glevet : lavaret o deuz ne vezo ket a emgann hirio.

JEANN

Hel lavaret euz bet d'in dija : mes perag an dra-ze ?

LAHIR

Abalamour kear a zo brema krenv ar bevans ennh, hag e c'heller gortoz ken a zigaso ar Roue soudardet all d'hor zikour. Beteg neuze, dorojou kear ne vezint digoret da zen, ré zempl ounp, re skuiz evit dont a benn euz ar Zaozon.

JEANN

Bet oc'h euz ho kuzul, ha me ive, em euz bet va hini. Hag ententit mad : lavarou va Zentezed a deui da vir : lavarou ho kapitened a 'z ai gant an avel. Labour braz am euz da ober hirio, va goad a redo, mes kastell an Touriou a vezo d'eomp araog an noz.

LAHIR

Ma 'z it, c'houi, me ne jomin ket varlerc'h. Mont a ran buan d'en em beurliska, rag meur a voall daol a vezo da rei ha marteze da reseo, araog ma vezo an Touriou d'eomp.

JEANN

It, ha deuit buan en dro, rag hirio ez euz izom tud a galon.

LAHIR, *dic'huina a ra he gleze*

Bevet ar Roue ! Bevet Jeann !

(Hag hen kuit).

TRIZEKVED DIVIZ

JEANN, *he-unan*

E pe leac'h 'ta e chom va banniel ? Mall am euz da daoler ar Zaozon er meaz euz ho c'hastell.

O c'houi, Sent ha Sentezed ar baradoz, c'houi dreist oll, Santez Catharin ha Santez Mac'harit, va zikourit.

Ah ! Setu va banniel o tont.

PEVARZEKVED DIVIZ

JEANN ; SOUDARDET gant ar banniel ;
JOB MARC ; GUENNOLE

AR ZOUDARDET

Bevet ar Roue ! Bevet Jeann ! Ar maro d'ar Zaozon !

JEANN

Va mignoured, ne livirit ket : maro d'ar Zaozon, ne c'houlennit maro den ; mes

Doue a fell d'ezhan e vefe taolet ar Zaozon er meaz euz ar Frans, ma n'ez eont ket anezho ho-unan.

(Ar soudardet a ia kuit.)

(Klevet a reer mouezioù o youc'hal) :

Deomp d'ezho ! Ar Zaozon d'an traon !
Beac'h d'ezho ! Goad ha lazerez ! Digor d'eomp ! Digor d'eomp !

JEANN, *d'ar goard Job*

Digor d'eomp ! n'eo ket digor 'ta ?

JOB

Nan, ha ne vezo ket digoret ; gouarner kear a vir.

JEANN

Aze ema ?

JOB.

Ia, aze e tle beza, e kichen.

JEANN

Grit d'ezhan dont ama dioc'htu.

(Job a ia er meaz.)

PEMZEKVED DIVIZ

JEANN ; DE GAUCOURT ; GOARDOU

JEANN, *kerkent ha ma vel ar gouarner*

C'houi a zo eun den fall ! Miret a rit ouz va zud da vont d'an emgann, mes mont a raint, mad mar plij d'eoc'h, mad ma ne ra

ket. Hirio, evel deac'h, ar gounit a vezo d'eomp.

(Trei a ra neuze varzu an or) :

Goardou ! digorit ! A berz Doue hag ar Roue me eo ar vestrez, me her gourc'henn ! Ar Zaozon a zo d'eomp hirio adarre.

(Jeann a f'a kuit epad ma klever trouz gant an or o tigeri hag ar zoudardet o vont d'an emgann).

C'HOUEZEKVED DIVIZ

DE GAUCOURT; GOARDOU

DE GAUCOURT

Ha me, petra rin ? Oh ! Jeann, Jeann ! na c'houi a c'hoar ren an dud ! An oll a ya d'ho c'heul. Mes petra velan ? Ha guir e vefe kement-se ? Ia, ar vistri braz ho-unan, Dunois, Alençon, Xaintraill, Lahir a velan o vont varlerc'h ar re all, savet var ho c'hezek pounner. Ha me a jomfe ama ? Nan, birviken ! Plas eur c'hapiten a zo e penn he zoudardet.

(D'ar goardou).

C'houi, diouallit mad ; ha ma teu, Doue ra viro ! ar Fransizien da blega, digorit mad ho taoulagad ha grit serra an or pa veloc'h ar Zaozon o tostât. Ententet mad eo ?

AR GOARDOU

Ia, mestr.

DE GAUCOURT

Ha brema, va marc'h brezel d'in, ma 'z in d'an emgann.

(Mont a ra kuit).

SEITEKVED DIVIZ

JOB ; FRANSA

JOB

Petra velezh, va mab ?

FRANSA

An oll a ya da heul Jeann d'Arc. Oh ! peger soun, peger kaer eo var he marc'h brezel, he banniel ganthi en he dourn ! Ar zoudardet a zo en em gavet dija dirag kastell an Touriou, ... taoler areont keuneut evit stanka an douveziou... Lakâta reont skeuliou oc'h ar mogerioù... mes ar skeuliou a zo pilet gant ar Zaozon. Ar c'hanoliou a groz hag ar bouliji mean a bil ar zoudardet dioc'h an daou du... O va zad, peger spountuz eo an emgann !... Oh ! perag e chouman-me ama ? Mont a ran, me ive...

JOB

Nan, va mab, n'emaout ket c'hoaz en oad. Mes plijadur am euz oc'h da glevet, guelet a ran n'eo ket maro c'hoaz va goad : bervi a ra e goazied va mab. Sonjal a ran p'az guelan, en amzer va yaouankiz.

FRANSA

An emgann a zo kounnaret atao, ar zoudardet paour a gouez dioc'h an druill en douveziou. Mes sevel a reont adarre, kalz anezho ; pignat a reont er skeuliou. Jeann a anavezan dioc'h he banniel, chom a ra er

penn araog tost d'ar mogerion, en despet d'ar c'hanoliou troet varzu ennh, en despet d'ar vein pounner a glasker taoler varnhi.

JOB

Mont a ra atao soudardet all var an dachenn evit kemeret plas ar re a zo kouezet?

FRANSA

Ia, tad... Oh ! setu Jeann var eurskeul... Siouaz ! diskaret eo, pebez koll ! o tristedigez ! o glac'har !... Ar Zaozon a zisken dre ar skeul-ze evit peur-laza anezhi. Nebeut a zoudardet a zo var dro Jeann... Ah ! setu eur marc'hek kalounek, goall skei a ra var ar Zaozon diskennet, lakât a ra Jeann var he varc'h, ema-hi e savete. Mes, siouaz ! Jeann diskaret, pep tra zo kollet... Ar Fransizien a dec'h : ne joum nemet hiniennou da enebi ouz ar Zaozon.

JOB

Diouallit, va mab, na deuffe ar Zaozon ama e kear.

FRANSA

Evit c'hoaz, ne deu nemet Fransizien goullet a zo c'hoant ho zavetei. Me gav din zoken emaer o sevel unan ama.

JOB

He anaout a ran, ar c'hapiten Gamac'h eo, brudet braz dre he nerz, ker brudet all dre he gasouni oc'h ar Zaozon, o deuz

dalc'het anezhan er prizoun epad meur a vloaz.

(Daou zoudard a zigas gant poan Gamach var zoug).

TRIVAC'HVED DIVIZ

AR GOARDOU ; GAMACH ; DAOU
ZOULDARD : PER ha PAOL

PER

Goall dizet e tle beza, rag semplet eo : hag hor c'hapiten ne zempl ket ker buan hag eur vaouezik... Digeri a ra he zaoulagad : mad eo.

GAMACH, *en eur zavel he benn*

Petra zo ? E pe leac'h emaoun ?

PER

En Orleans.

GAMACH

Petra zo en em gavet ?

PER

Tizet oc'h bet gant eun tenn benag, hag ho kar a zo goullet.

GAMACH

Ah ! mil gurun ! Gounit a reomp da viana ?

PER

Nan, koll a reomp evit c'hoaz ; fizians am euz evelato.

GAMACH, a c'hourvez skuiz-maro en eur lavaret :

Mil malloz d'ar Zaozon daonet !

JOB

Penaoz e c'hellit-hu kaout fizians ?

PER

Goude beza tennet ar c'hapiten Gamach euz a gichen kastell ar Zaozon brein, ounp choumet d'ober eun ehan en hanter 'n hent. Jeann d'Arc, tizet ive, a zo deuet tost aoualc'h d'eomp, liou ar maro varnezhi. Lenva a rea o velet he goad o redet, mes goude e deuz kemeret kalon ha tennet he-unan ar bir a ioa sanket en he skoaz : louzaoui a reaz ar gouli. Ar vistri a lavare : « Koll a reomp, greomp d'hor zoudardet » paouez d'en em ganna ha distrei e kear ; » mes Jeann a zavaz he mouez : « En han' » Doue, emezhi, ne dec'hit ket, an Touriou » a vezo d'eomp hirio. » Ar c'hapitened o deuz pleget da Jeann, rag her gueleit a c'hellit : an emgann a gendalc'h.

JOB

Guir a livirit : kendalc'her a ra.

(Gamach a zihun).

PER

Brema, Aotrou Gamach, ounp diskuiz adarre. N'emaoc'h var hent den aze, mes mar kirit, ni ho kaso dounnoc'h e kear.

GAMACH, en eur zevel he benn

Bennoz Doue d'eoc'h, mignoured. Ama e choumin dizoursi, ama e c'hellin gouzout penaoz ez ai an traou.

PER

Ni a garfe, kapiten, distrei d'an emgann evit skei eun taol benag all var ar Zaozon daonet. C'hoant on deuz da baea eun nebeut euz ho tle.

GAMACH

It, ha ra vezo va c'hounnar ganeoc'h !

PER

Bennoz Doue, kapiten. Pa vez Saozon da ziskar, eo guelloc'h ganen beza en emgann eget en eur friko.

(Mont a reont kuit ho daou).

NAONTEKVED DIVIZ

GAMACH ; AR GOARDOU

GAMACH

Klevet a ran trouz ar c'hanoliou

JOB

Ia, en em zrailla a reer adarre goasoc'h eget biskoaz. Gant trouz ar c'hanoliou e klevet youc'hadennou skiltr an dud, ha trouz an armou oc'h en em steki. Mes ne velan ket Jeann d'Arc.

FRANSA

Me ne velan ket anezhi ken nebeut, tad,
kement a vanniellou zo. Spontuz eo ar
stourmad. Siouaz ! ni eo a rank plega... O
Frans ! paour keaz Frans !

GAMACH

Kila ! dirag ar Zaozon brein. O va gar !
devi a ra brema. Oh ! mar gelfen mont var
an dachenn da rei eun taol benag, ha pignat
da c'houde var mogerious ar c'hastell.

FRANSA

Ah ! Jeann a velan, en douvez ema gant
he banniel... E leac'h kila, ar Fransizien a
ya brema var araog... Sevel a reont er
skeulious, an tan a zo spontuz... Ni a zo
var ar voger... Ar c'hastell zo d'eomp ! Ar
gounit d'eomp ! Bevet ar Roue ! Bevet
Jeann d'Arc !

GAMACH, *gant teneredigez*

Va mignoun ker, ne c'helfac'h ket va
dibrada, c'houi hag ar goard all, evit ma
c'hellin gueleit ar Zaozon o tec'het, hag hor
zoudardet var ar c'hastell ? Gant ma velin
eur pennadik ebken !

(Fransa ha Job a zibrad-ar c'hapiten mac'haniel.)

GAMACH

Oh ! leski a ra va gar ; va list da c'hourvez
adarre : gueleit em euz. Ah ! Saozon mil-
liget ! ema achu ho kalloud.

FRANSA

Ra vevo ar Roue ! ra vevo Jeann d'Arc !
Ar gounit d'eomp ! Ar Zaozon d'an traon !
Ar Zaozon d'ar gear ! Bennoz da Zoue !
Bebet Orleans ! Bevet Jeann !

KAN AR ZOUDARDET

Ton : *Sao, Breiz-Izel*

Kanomp brema silvidigez hor bro,
Kignet gant ar Zaozon garo,
Divoadet oll ha kaset da netra,
Savet hirio da huella ;
Eur plac'h yaouank a zoug an *drapeau* :
Ra vevo Jeann d'Arc, ra vevo ato !

Arc'heal an emgann euz bar an envou,
A ziskennaz 'berz an Aotrou :
« Sav, emezhan, Guerc'hez braz a galon,
» Sko, pil, bress ha flastr ar Zaozon,
» Nerz da Zoue ganez a vezo » :
Ra vevo Jeann d'Arc, ra vevo ato !

Sentet e deuz, ema var an dachen,
Soun var he marc'h, eb aon rag den ;
'Vel pennou ed dindan ar falz o ruill,
Enebourien gouez dioc'h an druill ;
Nebeut ebken a c'hell mont en dro :
Ra vevo Jeann d'Arc, ra vevo ato !

Kear Orleans gant he moger huel,
A loa kelc'het gant dek kastel,
Dek kastel Saoz a voaske oll keariz,
N'hellent ket tec'het e nep giz ;
Torret ar c'helc'h, brevet tro var dro :
Ra vevo Jeann d'Arc, ra vevo ato !

EHAN

EIL ARVEST Reims

Epad an arvest-ma, an divizerien a zo e kamp
eun dijentil euz a Reims en deuz roet digemer
d'ar roue. Eur grusifi a zo stag ouz ar voger ;
eur gador gaer a veler er penn huella.

KENTA DIVIZ

AR FLOC'HIK GUENNOLE *he-unan*

Pebez devez, va zudou, pebez devez ! Piou
en devije lavaret ! Hirio e vezo kurunet ama,
e kear Reims, ar roue Charles, seizved euz
an hano.

Tri miz so, ni Fransizien ne gredemp ket
finval gant ar Zaozon milliget ; Jeann d'Arc
a zo deuet, poania e deuz great, ha brema,
ar Zaozon a zo diskaret, pladet, frigaset ;
ar peb brasa euz ar vro a zo d'eomp. Pebez
labour on euz great ! Mes... petra glevan ?
Skei a reer var an or. (*Krenv.*) Digorit.

(Eur goard a deu a vel).

EIL DIVIZ

GUENNOLE ; EUR GOARD

AR GOARD

Eur bourc'hiz yaouank a c'houlenn kao-
zeal gant Jeann d'Arc.

GUENNOLE

Jeann n'eo ket distro euz an iliz c'hoaz ;
evelato, livirit d'ezhan dont ama atao, da
c'hortoz.

AR GOARD

Mad eo.

(Mont a ra da gichen an or hag e lavar :

Deuit ebarz dioc'htu.

(Epad ma teu ar bourc'hiz a vel, ar goard a 'z a kuit).

TREDE DIVIZ

GUENNOLE ; FRANSA MARC e bourc'hiz

FRANSA

Devez mad d'eoc'h, va mignoun.

GUENNOLE

Euz a be leac'h oc'h-hu, mar plij ?

FRANSA

Euz a Orleans.

GUENNOLE

Euz a Orleans !

(Mont a ra dioc'htu da starda
he zourn d'ar bourc'hiz).

Eur gear vad, tud a galoun ennhi, eur
gear gaer ive, gant he ilizou, he zouriou,
he mogeriou. Eüruz oun bet ennhi.

FRANSA

Bez' oc'h bet ennhi ?

GUENNOLE

P'on euz kemeret kestel ar Zaozon me a
ioa eno, me am euz sikouret.

FRANSA, *o sellet souezet ouz ar floc'hik*

Sikouret! c'houi, ker yaouank all!

GUENNOLE, *ober a ra he zoktor*

Yaouank oun, ia, guir eo, mes d'an dud savet mad,
Ar galoun, evit dont, ne c'hortoz ket an oad.

FRANSA

Va mignoun, n'ouzon ket hag eur goall
c'hoarier oc'h var dachen an emgann; mes
eun teod distagellet mad oc'h euz, var a
velan.

GUENNOLE

Var dachen an emgann, evit anzao ar
virionez, ne ran ket nemeur a labour; mes
delc'her tost da Jeann a ran atao, en he
c'hichen d'ezhi n'emeuz ket aon rag Saozon
ar bed oll.

FRANSA

Ho kredi a ran; evelato, e tle beza eur
riskl benag evidoc'h avechou.

GUENNOLE

Evidon-me? Ia, marvad! Me a zo ker
bian, ma sut ar bouliji dreist ya fenn; ker
moan, ma sko ar c'hlezeier abiou d'in atao.

FRANSA

Hag e c'heullit Jeann abaoe Orleans?

GUENNOLE

Atao ganthi abaoe! Na me a gav diez
n'emaoun ket ken er skol; m'em bije bet, sur
aoualc'h, ar priz kenta var ar *géographie*,
kement a geariou hag a vro am euz goelet
e berr amzer.

FRANSA

Guir eo; araog diblas euz a Orleans er
vech diveza, o poa kemeret dija Jargeau,
Meung ha Beaugency.

GUENNOLE

Nag abaoe! Auxerr, Troyes, Chalons ha
keariou all biannoc'h o deuz pleget d'eomp
e berr amzer.

FRANSA

Reseo a reac'h, mechans, sikour dre ma
zeac'h: kalz soudarded nevez en em vode
en dro d'eoc'h.

GUENNOLE

Kalz soudardet! Nan, n'euz deuet d'hor
sikour abaoe m'omp diblas et euz a Orleans
nemet ar c'homt de Richemont gant daou-
zek kant euz he Vreiziz. Paotred dispount
ha soudardet mad eo ar Breiziz-se. Mes...
skei a reer var an or, dioc'h ma kav d'in.
(*Huel.*) Digorit.

(Lahir a deu a vel).

GUENNOLE

P'on euz kemeret kestel ar Zaozon me a
ioa eno, me am euz sikouret.

FRANSA, *o sellet souezet ouz ar floc'hik*
Sikouret! c'houi, ker yaouank all!

GUENNOLE, *ober a ra he zoktor*
Yaouank oun, ia, guir eo, mes d'an dud savet mad,
Ar galoun, evit dont, ne c'hortoz ket an oad.

FRANSA

Va mignoun, n'ouzon ket hag eur goall
c'hoarier oc'h var dachen an emgann; mes
eun teod distagellet mad oc'h euz, var a
velan.

GUENNOLE

Var dachen an emgann, evit anzao ar
virionez, ne ran ket nemeur a labour; mes
delc'her tost da Jeann a ran atao, en he
c'hichen d'ezhi n'emeuz ket aon rag Saozon
ar bed oll.

FRANSA

Ho kredi a ran; evelato, e tle beza eur
riskl benag evidoc'h avechou.

GUENNOLE

Evidon-me? Ia, marvad! Me a zo ker
bian, ma sut ar bouliji dreist ya fenn; ker
moan, ma sko ar c'hlezeier abiou d'in atao.

FRANSA

Hag e c'heullit Jeann abaoe Orleans?

GUENNOLE

Atao ganthi abaoe! Na me a gav diez
n'emaoun ket ken er skol; m'em bije bet, sur
aoualc'h, ar priz kenta var ar *géographie*,
kement a geariou hag a vro am euz goelet
e berr amzer.

FRANSA

Guir eo; araog diblas euz a Orleans er
vech diveza, o poa kemeret dija Jargeau,
Meung ha Beaugency.

GUENNOLE

Nag abaoe! Auxerr, Troyes, Chalons ha
keariou all biannoc'h o deuz pleget d'eomp
e berr amzer.

FRANSA

Reseo a reac'h, mechans, sikour dre ma
zeac'h: kalz soudarded nevez en em vode
en dro d'eoc'h.

GUENNOLE

Kalz soudardet! Nan, n'euz deuet d'hor
sikour abaoe m'omp diblas et euz a Orleans
nemet ar c'homt de Richemont gant daou-
zek kant euz he Vreiziz. Paotred dispount
ha soudardet mad eo ar Breiziz-se. Mes...
skei a reer var an or, dioc'h ma kav d'in.
(*Huel.*) Digorit.

(Lahir a deu a vel).

PEVARE DIVIZ

LAHIR ; FRANSA ; GUENNOLE

LAHIR

Guelet a ran, paotred, ne oa ket red d'in
choum da zale e toull an or evidoc'h-hu,
mes sonjal a ran em bije kavet tud a renk
ama, setu em boa aon o tont ebars eb skei
var an or.

Jeann n'eo ket deuet c'hoaz ?

GUENNOLE

Choumet eo en iliz da drugarekat Doue,
mont a ran d'he c'hask dioc'htu.

(Guennole a 'z a er meaz).

PEMPED DIVIZ

LAHIR ; Fransa MARC

FRANSA

Daoust ha n'eo ket c'houi ar c'hapiten
Lahir ?

LAHIR *souezet*

Eo zur, mes ne c'houzon ket penaoz nag
e pe leac'h em bije ho kuelelet : kement a
dud am euz guelet gant Jeann d'Arc en
daou viz diveza-ma, ma teu an hanoiou da
zruilla em fenn.

FRANSA

Me zo euz a Orleans, hag em euz ho kuelelet
var mogerious kear. En devez-se oc'h euz
goal gempennet ar Zaozon en eur ziskar
kastell an Touriou, hag antronoz em euz
lavaret kenavezo d'ezho, kenavezo evit atao
gant ar brasa plijadur.

LAHIR

Anat eo, den yaouank, n'oc'h ket den a
vrezel ; m'em euz lavaret d'ezho : kenavo ar
c'henta guelet ; hag a drugare Doue, roet
em euz d'ezho meur a gentel abaoe.

FRANSA

Ia, lavaret a reat, dre ahont, oc'h euz
goall c'hoariet.

LAHIR

Goall c'hoariet ! Ar c'hlezeier n'int ket
choumet er feur da vergli : ar c'hleze a veze
e vann kasi bemdez ha beac'h d'ar Zaozon.
Araog Orleans, eur Zaoz a rea da zek
ac'hanomp-ni krena, n'ouzon ket perag ;
hirio, dek ac'hanomp a ra da gant Saoz
tec'het.

FRANSA

Kounta reat, dre zu-ma, oc'h euz roet,
c'houi, eur goall lam d'ar Zaozon e Patay.

LAHIR

Patay ! Pebez frigas on euz great anezho
e kichen ar gear-ze ! Kurun ha tan ! Mil,
mil... ah ! peoc'h ! Jeann e deuz difennet

pec'hi ; mes, hen toui a ran var... var va baz, n'on euz great en neb léac'h buannoc'h labour. Me a ioa er penn araog euz ar Fransizien p'en em gavjomp tost d'ar Zaozon ; setu ma lavaraz Jeann d'in : « It d'ezho, mes » it kempennik, kemerit hoc'h amzer ; p'on » devezo renket horzoudardet, ni ho sikouro » d'ho feurgas. » Ar Zaozon a ioa rannet e tri rumm. Sounn var va marc'h brezel, me a griaz d'am goazed : « Beac'h d'ar Zaozon. » Hi a respountaz : « Dao d'ezho ! » ha setu ni a lamm varnho. Ar rumm kenta a oue frigaset dioc'htu ganeomp, setu neuze, an daou rumm all, oll pe gazi-oll, a dec'has. N'o deuz ket memez roet amzer d'eomp d'ho guelet mad. Pevar mil anezho a oue lazet pe brizouniet en devez-se.

FRANSA

Pevar mil ! Goall c'hoari o poa great evelato.

LAHIR

Ia, guir eo. En devez-se em euz guelet pegen tener eo kalon Jeann. Unan euz hor zoudardet en doa, gant he gassouni, roet eun taol kleze d'eur Zaoz pa oa achu an emgann, ha goall dizet anezhan. Jeann a ioa tost eno ; diskenn a reaz divar he marc'h hag e kemeraz etre he divreac'h penn ar paour keaz gouliet, astennet var an douar. An den a ioa toc'hor ; Jeann a lavaraz d'ezhan ar c'homzou tenerra evit he zikour da gaout keuz d'he bec'hejou : gervel a

reaz ive eur beleg evit rei d'ezhan an absolver.

FRANSA

N'oun ket souezet o klevet kement-se, en Orleans e oa evelse ive ; da genta var dachenn an emgann, dispount kaer, leun a deneredigez da c'houde evit an dud dister. evit an dud a boan.

C'HOUECHVED DIVIZ

KOMT DE LA TREMOUILL ; LAHIR ;
FRANSA

LAHIR, *en eur zaludi ar C'homt pa deu a vel :*
Devez mad d'eoc'h, aotrou Komt de la Tremouill.

KOMT DE LA TREMOUILL

Ha d'id-te ive. Pigu an den yaouank-se ?

LAHIR

Eur mignoun deuet euz a Orleans evit guelet ar gouel.

DE LA TREMOUILL, *seac'h he c'her :*

Mad. Jeann d'Arc n'eo ket en em gavet c'hoaz ?

LAHIR

Nan, aotrou Komt ; choumet e tle beza da astenn he fedennou en iliz.

DE LA TREMOUILL

Oh ! amzer aoualc'h e devezo da bedi
epad ma vezo kurunet ar Roue. Lavaret a
reoc'h d'ezhi kemeret he renk en ho kichen
en iliz.

LAHIR

Em c'hichen-me ! N'oun ket din, Aotrou
Komt, da veza hirio e kichen Jeann d'Arc.

DE LA TREMOUILL, *seac'h he c'her* :

Marteze eo dleet d'ezhi beza da dosta
d'in-me, er penn huella ?

LAHIR

Da dosta d'eoc'h-hu ne dle ket beza, da
dosta d'ar Roue ne lavaran ket.

DE LA TREMOUILL, *gant fae* :

N'eo ket me a lavaro d'ezhi kemeret ar
renk-se. Eur plac'h hag a ioa deac'h o
tiouall he saout ahont e Domremy.

(Mont a ra kuit en eur zerra an or a frapp).

SEIZVED DIVIZ

LAHIR ; FRANSA

LAHIR

Guir eo, bloaz so e tioualle ar zaout, mes
hirio, eo gwest d'ober skol d'ar c'hapitened
brudetta. Mignounet ar Roue ne baouezont
da labourat enep d'ezhi, e kuz. Diblasat int

euz a Chinon en despet d'ezho, hag hirio
zoken, p'o deuz henoriou braz da gaout
digant ar Roue nevez, ne vezint ket laouen
aoualc'h, ma vez Jeann en ho c'hichen.

FRANSA

Jeann n'e deuz goulskoude great drouk
ebet d'ezho ?

LAHIR

Drouk ebet ? Lavarit 'ta e deuz great vad
atao. Jeann ne glask e pep tra nemet gloar
Doue ha mad ar vro. Mes klevet a ran
trouez, a gav d'in : hi eo a zo o tostât.

EIZVED DIVIZ

JEANN ; LAHIR ; FRANSA

FRANSA, *mont a ra varzu Jeann kerkent
ha m'her guel*

Devez mad d'eoc'h, Jeann.

JEANN

Ha deoc'h-hu ive, den yaouank ; euz a be
leac'h oc'h ?

FRANSA

Euz a Orleans. Karget oun gant va zad
ha gant oll vourc'hizien kear da lavaret
d'eoc'h eur vech c'hoaz, hon anaoudegez
vad evidoc'h. Plijet gant Doue rei d'eoc'h
buez hir evit brasa mad ar Frans.

JEANN

Orleans! Joa eo ganen gullet tud ar gear vad-se. Ne c'houzon ket petra deuin da veza divar hirio; va Moueziou n'o deuz diskleriet netra d'in evit an amzer da zont. Mes ma plijfe gant Doue e tistrofen c'hoaz en Orleans, ez afen di gant ar brasa levez. Kristenien stard ha Fransizien vad oc'h en ho pro.

FRANSA

Bennoz Doue d'eoc'h, Jeann. Laouen oun o velet an deiz o c'houlaoui evit ar gouel kaer-ma; mes kel laouen all e vezin o lavaret d'an Orleaniz ho komzou madelezu evitho.

EUR FLOC'HIK *a deu e kreiz en eur lavaret:*

Ar Roue.

(Ober a ra, gant he viz, da Fransa mont kuit).

NAVED DIVIZ

AR ROUE; JEANN D'ARC; DE LA TREMOUILL; LAHIR; KAPITENED ALL; FLOC'HIK.

AR ROUE, *e kreiz, azezet var ar gador gaer:*

Komt, ha merket oc'h euz he renk da bep hini bremaik en iliz-veur Reims?

DE LA TREMOUILL

Ia, Aotrou Roue. En dro d'eoc'h ha da

dosta en eun tu e vezo c'houec'h dijentil euz ar renk huela. An duk d'Alençon ho kenderv da dosta, komtet Klermont ha Vendom da c'houde, me gant ar c'homt de Laval ha Beaumanoir da ziveza. En tu all e vezo da dosta c'houec'h den a iliz: arc'heskop Reims er penn araog; ha da c'houde eskibien Laon, Chalons, Seez, Orleans ha Bourj.

AR ROUE

E pe leac'h e lakeoc'h Jeann d'Arc?

DE LA TREMOUILL

Etouez an dud a vrezel gant Dunois, Lahir ha Xaintraill; eno e kav d'in ema he renk.

AR ROUE

Nan, va mignoun, Jeann a vezo en hor c'hichen, en tu deou d'eomp epad an oll amzer. Ma tleomp reseo hirio kurunen Rouaned Frans ama e Reims; eo d'ezhi oump dleour euz ar c'hras kaer-ze; d'ezhi ha d'hor c'hapitened bras, mes d'ezhi dreist-oll.

DE LA TREMOUILL, *o trei varzu Jeann:*

Itroun, klevet oc'h euz ar Roue hor mestr; en he gichen ec'h en em lakeoc'h.

JEANN, *o trei varzu ar floc'hik*

Floc'hik, kea buan da glask d'in va banniel, rag ema tost ar mare da vont d'an iliz.

(Ar Floc'hik en em zil kuit).

DE LA TREMOUILL

D'ober petra ar banniel ? N'eo ket red he c'haout ganeoc'h mechans, en iliz, d'an offeren, pa vezo kurunet ar Roue.

JEANN

Va banniel a zo bet er boan, dleet eo d'ezhi beza en henor.

AR ROUE

Mall on euz da drugarekât Doue euz he c'hrasou, mall on euz da c'houlen diganthan grasou nevez evit dougen evel ma 'z eo dleet kaera mes ive pounerra kurunen a zo er bed-ma : kurunen rouaned Frans ; rag-se e pedomp ac'hanoc'h, tudchentil ha kapi-tened, da bedi bremaikevidompha ganeomp. Ra skuillo Doue he vennoz var ar vro ha varnomp-ni en deuz choazet en he vadelez evit he ren ; ra zeui da zikour hor zempladurez, hen, Roue ar Rouaned, ha mestr oll boblou an douar.

DE LA TREMOUILL

D'an iliz !

(An oll a 'z a kuit).

DEKVED DIVIZ

DAOU C'HOARD : PER HA PAOL

PER, *laouen* :

Ni eo a zo karget, neuze 'ta, da ziuall al lez.

PAOL, *seac'h he c'her* :

Ia, ni eo paotred an oferen vintin.

PER

Pebez joa ! pebez levenez !

PAOL

Ia, evit ar re all.

PER

Ar c'hleier a zouno, an dud a gano, ar c'hanoliou a grozo...

PAOL, *var he c'her* :

Ha me bec'ho.

PER

Asa, mes, pebez penn du a zo ouzot-te hirio ? Daoust ha klanv e vefez ?

PAOL

Ia, gant an drouk a zo ennon.

PER

Ha perag ? mar plij, aotrou ?

PAOL

Perag ? Perag ? ma n'eo ket eur vez ? Lavar ama d'in : an oll a zo laouen, an oll a gano epad ma vezimp ama, ni, evel daou brizounier.

PER

Ni gano ive, mar kerez ! desket em euz an ton.

(Kana ' ra var don : Sao, Breiz-Izel).

Savomp hirio eur ganaouen nevez,
En honor d'ar Roue Charles,
Kurunet eo, vel he dud koz guehall,
Gant kurunen aour flamm Bro-C'hall ;
Breac'h Jeann d'Arc ' deuz he zikouret :
Ra vevo Charles ! ar Roue Seizved !

Difenn a rai an intañvez, ar paour,
Chadenna rai an torfetour ;
Bez' e vo breac'h Doue gallouduz,
Ganthan reno peoc'h, vertuz,
Laouen breman ha laouen bepred :
Ra vevo Charles ! ar Roue Seizved !

(Paol a gan, evel en despet d'ezhan,
komzou diveza pep post).

PER

Dioc'h ma velan, ne gavez ket brao ar
c'han.

PAOL

Petra fell d'id ! ar re all en iliz a velo ar
gouel, e leac'h ni ama, a joumo da zellet
ouz peder moger.

PER

Me a zisklerio d'id, e berr gomzou, ar pep
brasa euz kement a vezo great.

PAOL

Lavar mar karez, mes petra zervich ! pa
'z eo guir ne velin netra.

PER, *henvel euz eun doñtor :*

Da genta, evit konsakri eur Roue, eo
red kaout euz an Oleo Sakr burzuduz a zo

bet implijet gant sant Remy p'en deuz
konsakret Clovis. An Oleo sakr-ze a zo
ama, e kear. Mistri braz an arme a zo eat
er mintin-ma, var varc'h, da glask abat
sant Remy hag an Oleo Sakr.

PAOL

Me, ne velin ket an abat.

PER

Dirag an iliz-veur e vezo an Aotrou
Arc'hescop gant he Chalonied guisket en
ho c'haerra ; reseo a rai an Oleo Sakr gant
respet evit he gas var an aoter vraz. Ar
Roue yaouank a vezo daoulinet e traon an
aoter ; an daouzek kenta euz ar rouantelez
en dro d'ezhan evit digas da zonj euz an
daouzek Abostol ; c'houec'h den a lez en
eun tu, c'hquec'h den a iliz en tu all.

PAOL

Me, ne velin ket an daouzek.

PER

An Arc'hescop a gano an oferen ; eun di-
jenteil a renk huel, an duk d'Alençon, a
zougo epad an amzer-ze ar c'hleze dirag ar
Roue. Goude m'en devezo ar Roue touet
var he le e tifenno an Iliz, an dud paour ha
dister, koulz an intañvez, evel ar minor
keaz, an duk d'Alençon her grai marc'hek.

PAOL

Me, ne velin ket an duk d'Alençon.

PER

An Aotrou Arc'heskop a verko neuze ar Roue gant an Oleo Sakr ha burzuduz en eur ober, gant an Oleo-ze, sin ar groaz var he benn, he beultrin; he ziouskoaz hag he zivreac'h. Goude e roi d'ezhan he gleze hag e lakai var he benn ar gurunen aour, kurunen Rouaned Frans o lintra gant an aour hag ar vein presiuz.

PAOL

Me, ne velin ket ar gurunen.

PER

Da c'houde, ar Roue nevez a resevo ar Gommunion Zantel euz a zourn an Arc'heskop, hapa vezo achu, an trompillou a zouno ken a dregarno an iliz gantho; neuze an oll duket ha komtet, bourc'hizien pinvidik hag artizaned dister, tud a iliz ha tud ar bed a youc'ho a bouez penn : « Bevet ar » Roue nevez ! Bevet ar Roue Charles Seiz- » ved ! Buez hir d'ezhan ! » Hag ar Roue a dreuzo an iliz hag ar blasen vraz evit ma c'hello an oll gullet he c'hloar.

PAOL

Me, ne velin ket ar Roue.

PER

N'her gueli ket en iliz, nan, sklear eo ; mes ama, e c'hellimp he velet. Pa vezo achu al lidou sakr, hag e tleont beza achu dija, an amzer a dremen buan epad ma tibuner

marvaillou, ar Roue, an duket, ar c'homtet a deui ama ha ni ho guelo.

PAOL

Na Roue, na duket, na den ; ni a vezo kaset kuit.

PER

Ema-int o tont, peoc'h !

(Mont a reont unan a bep tu).

UNNEKVED DIVIZ

JEANN ; DE LA TREMOUILL ; GOARDOU

DE LA TREMOUIEL, *d'ar goardou :*

Petra rit aze, c'houi ?

JEANN D'ARC

Ar re-ze o deuz diouallet ar maner epad an offis, ha n'ho deuz ket c'hoaz gullet ar Roue nevez : choumit aze unan a bep tu.

PER ha PAOL

Bennoz Doue d'eoc'h, Jeann.

AR FLOC'H, *o tont a vel :*

Ar Roue !

(Lahir ha re all a deu da heul ar Roue).

DAOUZEKVED DIVIZ

AR ROUE ; JEANN ; DE LA TREMOUILL ;
GOARDOU ; FLOC'HIK

(Ar Roue a azez en he gador, e kreiz ;
he dud en dro d'ezhan).

JEANN D'ARC, o taoulina dirazhan :

Ha brema, va Roue karet, brema eo
great bolontez Doue, resevet oc'h euz ho
kurunen e Reims ; Doue en deuz diskouez-
zet d'an oll eo c'houi ar guir Roue, an hini
a zo dre vir rouantelez Frans d'ezhan.

AR ROUE

Jeann, eüruz ounp da veza resevet hor
c'hurunen ama, el leac'h m'eo bet kurunet
hon tud koz en hon raog, hag hon eürusdet
a ioa leun hirio, abalamour c'houi a ioa da
dosta d'eomp evel ma 'z eo dleet. Lakeat
oc'h ganeomp e penn hon arme, e penn
oll zoudardet Frans ; c'hoant on euz da rei
d'eoc'h ouspenn-ze, eur renk huel etouez
an noblans ; rag e goazied piou e red guel-
loc'h goad eget en ho re c'houi ?

JEANN

Bennoz Doue d'eoc'h, va Roue ; choum a
rin e penn ar zoudardet, rag bolontez Doue
a zo e kASFenn ar Zaozon er meaz euz hor
bro : mes roit an henoriou d'ar re all. Eun
dra evelato a c'houlennin digant va Roue
en dervez kaer-ma : ma chomfe hiviziken

eb taillou parrezioù Greux ha Domremy, pa
'z eo guir eno oun bet ganet ha savet.

AR ROUE

Ho koulenn, Jeann, a zo roet d'eoc'h.
Ouspenn-ze, ma ne fell ket d'eoc'h beza
lakeat e renk an noblans, ho tad da viana a
vez eo er renk-se. Hor sekretour a verko an
dra-ze, hag a gaso liziri noblans d'ho tud e
Domremy. Ne c'hellimp morse ober re a
vad d'eoc'h-hu, a zo deuet d'hor zavetei a
berz Doue he-unan.

(An oll a 'z a kuit, Jeann da ziveza).

TRIZEKVED DIVIZ

JEANN ; PER

(Per, eat kuit dre eun or, a deu buan
en dro da gaout Jeann p'edo o vont
- var an treujou dioc'h an tu all).

PER, en eur zaludi

Jeann, daou zen koz a c'houlenn ho
kuelet.

JEANN

Daou zen koz ! Euz a Reims int ?

PER

Nan, tud divar ar meaz pe dud estren o
deuz doare da veza.

JEANN

Grit d'ezho dont.

(En eur gomz outhi he-unan) :
Daoust piou int ?

PEVARZEKVED DIVIZ

JEANN ; JACKEZ D'ARC ; DURAND
LAXART

JEANN

Sell ! va zad eo ! Oh ! va zad ! tad ker !

JACKEZ D'ARC

Va merc'h !

(Pokat a reont an eil d'egile, hag e
choumont d'en em zellet).

JEANN, *o sellet ouz Durand hag o kregi
en he zourn :*

Yec'hed mad d'eoc'h, eotr Durand, pe-
naoz a rit ?

DURAND

Yac'h, a drugare Doue, ha c'houi ?

JEANN

Me ive. Mes, ha va mamm ?

JACKES

A zo yac'h ive.

JEANN

Doue ra vezo meulet ! Hag evelse oc'h
deuet ho taou beteg ama ?

JACKES

Ia, va merc'h. Deuet ez euz beteg ennomp
eun enkleo euz an traou burzuduz ac'h euz
great hag...

JEANN, *var ger he zad :*

Am euz great, nan, va zad : en deuz
great Doue dreizon ; rag dourn Doue a zo
sklear em oberou.

JACKES

Guireo, merc'h, Doue en deuz bet truez
ouz ar Frans ha kennerzet da vreac'h.
Deuet oump ama da lavaret d'id out par-
dounet, pell a zo, evit ar boan ac'h euz
great d'eomp o vont euz ar gear ; rag en-
tent a reomp mad, da vamm ha me, n'ec'h
euz great nemet bolontez an Aotrou Doue.

JEANN

Mil bennoz Doue d'eoc'h, va zad, evit ar
ger-ze a livirit d'in. Guir eo, gouzout a rean
e oan pardounet : va Moueziou o doa hen
diskleriet d'in ; mes freasoc'h ha dudiu-
soc'h eo ar ger a bardoun pa deu divar
muzellou eun tad karet.

JACKES

Ia, pardounet out. Eüruz oun bet da gaout

eun den kalounek en deuz great ar veach ganen.

JEANN

N'oun ket souezet e vije deuet va eontr ganeoc'h ; anaout a ran pell zo he galon vad. Pa nefe c'houi, va eontr, n'em bije morse, guechall, kredet mont da gaout de Baudricourt da Vaucouleurs. C'houi eo oc'h euz va renet, va sklerijennet. Rei a rit d'in hirio eun testeni nevez euz ho karentez : mil bennoz Doue d'eoc'h.

DURAND

Paet oun euz va foan, Jeann, ha paet mad, p'em euz guelet an dervez kaer hirio. Digollet oun, ha mont a rin laouen d'ar gear.

JACKES

Ia, Jeann, digollet ounp. Oh ! pa velen bremaik Roue Frans lakeat var dron he dud koz, pa velen va merc'h en he sa soun en he gichen, sounn he banniel ganthi ; pa zonjen eo hi, va merc'h d'in-me, eo e deuz renet ar Roue yaouank beteg Reims, eo hi e deuz diskaret arre a glaske enebi outhan, e oa beuzet va ene el levenez, hag e rede puill va daelou.

JEANN

N'eo ket me eo em euz great an oll draouze, tad ; Doue eo, dre va dourn.

JACKES

Pa velen ac'hanout ken tost d'ar Roue, huelloc'h eged an noblansou braz, ne greden ket tostât ; mes ama, brema, e kavan va merc'h ; n'eo ket kollet gant an henoriou, choumet eo ar memez hini atao ; n'e deuz mez ebet oc'h hor guelet, ni tud groz, tud diyar ar meaz.

JEANN

Mez ebet ! O va zad, ma c'houfac'h nag a boan a rit d'in o komz en doare-ze ! Oh ! hirio zoken, e kreiz an henoriou, pa oa daoulagad an oll o para var ar Roue ha varnon, en iliz-veur Reims ; hirio, p'em boa kement a leac'h da drugarekât Doue euz ar grasou dispar am euz resevet digan-
than, va spered a ioa dibarfet. Meur a vech em euz sonjet er gear, epad ar pemp heur m'oump choumet en iliz, avi em boa ouz va c'hamaradezet a vev-disoursi ahont e Domremy, o sikour ho zud da gas an tiegez en dro.

JACKES

Skuiz out eta gant ar brezel ?

JEANN

Va zad, ne garan ket ar brezel ; bale a ran e penn ar zoudardet evit ober bolontez an Aotrou Doue diskleriet d'in gant Moueziou va Zentezed.

DURAND

N'ec'h euz ket aon en emgannou ?

JEANN

N'em euz aon nemet rag eun dra ebken :
aon da veza guerzet d'ar Zaozon.

JACKES

Mes brema, eur vech kurunet ar Roue,
ema achu da labour, e c'hellez dont ga-
neomp d'ar gear.

JEANN

Nan, va zad, n'eo ket echu va labour keit
ha ma choum Saozon var douar Frans ; mes
va Moueziou ne ziskleriont ket an amzer da
zont ker freaz ha beteg hen. Araog m'oump
deuet ama, va Moueziou a lavare d'in :
« Kea dispount, an treac'h a vezo d'id ».
Divar vremen, ne c'houzon ket an traou
a dle en em gaout. Sikour a rin ar Roue
yaouank da beure'hounit he rouantelez ;
mes siouaz ! ar Roue a gar re ar blijadur
hag ar re zo da dosta d'ezhan, a zo-o touella
anezhan.

JACKES

Ne garont ket ar brezel ?

JEANN

Karet a reont an henoriou, an ebatou, ha
n'en em blijont tam er brezel. Euz a Reims
e tlefemp mont da gemeret kear Paris. Bale
a rin, mes ar Roue, va heuil a rai ? Ne
c'houzon ket ; guech e lavar ia, guech e
lavar nan. Mes ober a ran bolontez Doue,
ha setu perag ez in atao gant va hent a zo

an hent eun. Va zad ker, roit d'in ho pen-
noz, evit ma kendalc'hin atao d'ober bolon-
tez Doue.

JACKES

Ra zeui Doue d'az pennigen, va merc'h,
ra gendalc'ho he elez hag he zentezed d'az
tiuall ha d'az tifenn, beteg ma vo achu da
labour ganez.

JEANN

Kenavo, va zad ker, goulennit er gear
pedennou an oll evidon.

(Jeann a bok d'he zad hag a stard dourn
he contr).

EHAN

TREDE ARVEST

Rouen

Andivizerien, en arvest-ma, a zo e prizoun Rouen.

DIVIZ KENTA

JEANN, *guishet oll, chadennet var eur skaon :*

Doue oll c'hallouduz, deuit d'am zikour
Nag a boan am euz ama. Siouaz d'in ! goude
beza torret galloud ar Zaozon, oun bet dis-
karet, me ive, var dachen an emgann dirag
Compiegn. Bloaz a zo abaoe, bloaz so e
vevan divar bara an anken, ha dour an an-
goni, heskinet gant eun eskop fall, Cauchon,
eskop Beauvais, en deuz c'hoant d'am luia
gant he c'houlennou traitour, diouallet noz-
deiz gant goardou Saoz, yud evel loaned
gouez. Perag o deuz va lezet ho-unan eur
pennad hirio ? Ne c'houzon ket, mes eun
dra benag a vraz a dle beza, pa 'z eo guir
n'emaint ket aze.

EIL DIVIZ

JEANN ; TRI GOARD SAOZ : JOHN GRIS,
JOHN, WILLIAM

JOHN GRIS

Ac'hanta, sorserez daonet ! n'eo ket deuet
Lusifer d'az klask, epad ma n'edomp ket
aze ?

JOHN

Oc'h piou, boued ar groug, e oaz-te o
kaozeal ? Pa vezi krouget pe zevet bremaik,
ne vezo ket kement a storlok gant da c'hi-
nou.

WILLIAM

Beteg peur, mil gounnar an ifern ! e
chomi var hor buez d'eomp-ni ? Bloaz so
emaomp o tiouall ar viltans-ma, ma n'eo
ket eur vez !

JOHN GRIS

Ha brema, potred, p'on euz bet bep a
vanne soun, ma raffemp eun taol c'hoari ?

JOHN

En henor d'ar plac'h ifern-ze ? Er memez
tra. Ne dal ket goulskoude ar boued a zreb.

WILLIAM

Oh ! n'eo ket druz he friko ama, red mad
eo bet d'ezhi ober kof moan aliez, bara loued
ha dour maro a zo re vad evithi.

JOHN GRIS

Pa zonjan eo bet paet an diaoulez, ar
baotrez saout-se dek mil lur ; ia, dek mil
lur, priz eur roue ! Kea 'tao !

(En eur dostât ouz Jeann) :

Devet e vezi. D'id-te, John ! c'hoari 'ta !

JOHN, *en eur ruill an dizou :*

Eiz ! Mad eo. D'id-te, William !

WILLIAM

Dek ! Taol kaer. D'az tro, John Gris !

JOHN GRIS, *o ruill a ra d'he dro :*

Pevar ! Kollet. Ar zorserez vreïn-ze eo a
zo kaoz.

(En eur dostât ouz Jeann) :

Devet e vezi, ha me a daolo eun hordenn
geuneut en tan ! E plas ar c'hoz eskop
Beauvais-ze, m'em bije krouget an diaou-
lez-ze pell ' zo.

JOHN

Peoc'h divar benn eskop Beauvais : paea
mad a ra.

JOHN GRIS

He labour ne ra ket mad. Kaset en deuz
bet, her gouzout a rit, eun den du-hont, da
vro an ampoezoun-ze, evit goulenn testeni
en he enep. Hag ar lan en deuz kaset, a zo
distroet ama en eur lavaret : « N'em euz
» klevet nemet meuli Jeann e Domremy. »
Netra da lavaret euz ar boued ar groug-se !

WILLIAM

En eur glask mad e kaver atao : m'em

bije kentoc'h livet gevier, ha kavet testou
dioc'h an druill. Ar C'hauchon a zo a du
gant ar pezh fall-ze.

JOHN

Peoc'h ! grea he hano anezhan evel an
dud o deuz desket kaozeal ; lavar : an aotrou
Cauchon, eskop Beauvais, paea mad a ra.

WILLIAM

Te peuz bet arc'hant diganthan, te ?
gaouiad !

JOHN

Ia, me ! Tri devez so, da lavaret eo, disul
diveza, pa oan o tont da ziuall ar zorserez
daonet-se evel hirio, an eskop a deuz
d'am c'haout : « Evit gellout koundaoni
» Jeann, emezhan, eo red ober d'ezhi keme-
» ret he dillad goaz en dro. Touet e deuz
» n'ho c'hemero mui. M'ho c'hemer a nevez,
» ez ai a enep he ger, hag e vezo barnet
» d'ar maro. » Me a respountaz d'an eskop :
« Entetet em euz. » Kerkent ha ma ouen
ama gant Daniel ha Sirver, me a laeraz an
dillad maouez a ioa e kichen ar guele, hag
a lakeaz dillad goaz boued ar groug-se en
ho leac'h.

JOHN GRIS

Ne oa ket eun dra diez ral da ober. Ha
goude ?

JOHN

Da c'houde, p'eo dihunet an tam diaoulez-

se, e deuz goulennet beza dichadennet evit
gellout sevel. Sirver a zichadennaz anezhi :
mes pa velaz eo dillad goaz a ioa e kichen
he guele, e tiskleriaz n'ho guiskje biken.

JEANN

Hag e peuz ar galoun d'en em fougeal euz
eur seurt dislealdet !

JOHN GRIS

Peoc'h a roi, viltans ! Ha neuze ?

JOHN

Neuze, an ifern a vaouez-se a jomaz da
vouzat en he guele beteg kreisdeiz. Mes
neuze e oue d'eomp.

JOHN GRIS

Divouza a reaz ?

JOHN

Sevel a ranke : Setu m'e deuz lakeat he
dillad goaz.

JOHN GRIS

Ha Cauchon en deuz ho paet ?

JOHN

Eskop Beauvais a zo bet brokuz, kerkent
ha m'eo bet kaset ar c'helou d'ezhan : n'euz
ket var an douar guelloc'h eskop evithan.

WILLIAM

Brokuz e c'helle beza, rag eur vez eo, e
guirionez ! Penaoz ! emaint aze eun toullad

doktored, n'o deuz da gondaoni nemet eur
plac'h dizesk, eur baotrez saout, ha n'int
ket evithi ! M'em bije koundaonet anezhi,
me, pell zo ! eb kement-se a ardou !

JOHN GRIS

Goasa pez so, an aer viber-ze e deuz
klevet hag ententet hon lavarou, hag a zo
bilim aoualc'h ganthi evit ho diskuill.

JOHN

Bezit dinec'h, paotred ! me a douo var va
le, dek guech kent eget unan mar karer,
eo gevier he lavarou, gevier savet ganthi
divar an noaz. Ha neuze, daoust hag ar
seurt viltansou-ze a zo da veza kredet ?

JEANN

Pardon evitho, o va Doue, ha pardon ive
evit ho servicherez. Her gouzout a ran,
tamallet oun bet e faoz, va fizians a lakan
ennhoc'h.

Da zeiz ar varn, pa vezo an oll dirazoc'h,
c'houi a varno hervez ar justis, al lealdet :
en deiz-se ebken e vezo anavezet oll falla-
griez va enebourien.

JOHN

Peoc'h a roi, boued ar groug !

WILLIAM

Asa, paotred, ha ma raffemp eun taol all !

JOHN

Dao d'ezhi ! Petra c'hoariomp ?

WILLIAM

Eur banne, na petra 'ta ! Allo, John Gris,
ruill an dizou.

JOHN GRIS, *taolet an dizou ganthan :*

Tri ? tri ebken ! Tri mil kounnar an ifern !
Me eo a ranko paea atao. Kos plac'h vrein !

WILLIAM, *ruillet ganthan an dizou :*

Seiz ! n'eo ket fall. Gounit a ran evit
c'hoaz. D'it-te, John.

JOHN

Unnek ! Mil baz dotu ! Ober eun taol ker
kaer all p'am bije bet aoualc'h gant pevar
pe bemp. Ober unneg evit gounit eur c'hos
banne. Dont a rit ?

(Ho zri ez eont kuit.)

TREDE DIVIZ

JEANN

Santez Catharin ha Santez Mac'harit, va
diou alvokadez er Baradoz, oh ! me ho ped,
va zikourit. Rannet eo va c'haloun, beuzet
eo en eur mor a dristidigez, rag siouaz !
n'em euz den d'am c'hentelia, den d'am
zikour nemedoc'h-hu. Oh ! deuit, deuit
buan !

(An diou Zantez en em ziskouez).

PEVARE DIVIZ

JEANN : AN DIOU ZANTEZ

JEANN

Bennoz an Aotrou Doue d'eoc'h, dre ma
tigasit sklerijen ar Baradoz en toul tenval-
ma. Ia ! mil bennoz Doue d'eoc'h, va diou
alvokadez santel, va diou difennourez :
c'houi a ro sklerijen d'am spered, ha nerz
d'am c'halon. Mes, petra respountin hirio
d'am barnerien ?

EUR ZANTEZ

Respount eb aon, rag Doue a vezo ganez.

JEANN

Hir eo va foan, ha braz va zristidigez.

EUR ZANTEZ

Merc'h Doue, bez dispount : soubl d'he
volontez santel ; arabad eo d'id kaout aoun
rag da verzerenti, rag dont a ri abarz ne-
meur e rouantelez ar Baradoz.

(A benn eur pennadik, ne veler mui ar Zentezed).

PEMPED DIVIZ

JEANN ; AN TRI GOARD : JOHN

WILLIAM, JOHN GRIS

(An tri goard a zeu a benn err var leur an **theatr**,
hag a joum eun ha sounn).

JOHN

Kant mil bennoz d'an diaoul en deuz hon

diouallet : eun tamik bian muioc'h, hag ar
c'homt de Warwick, gouarnner Rouen hag
hor mestr, en devije hor guelet o redet
kear. Ema o tont, mes n'en deuz ket hor
guelet, n'euz drouk ebet.

C'HOUEC'HVED DIVIZ

JEANN ; WARWICK ; GOARDOU

WARWICK

Az' emaoe'h ! Mad eo. N'euz netra a nevez
na gant ar brizounierez, na ganeoc'h ?

JOHN GRIS

Nan, Aotrou komt.

WARWICK

Neuze, dichadennit brema anezhi ; gou-
deze, it da eva eur banne da yechet ar roue
Herry.

(Rei a ra eur guennek benag).

AN TRI GOARD

Bennoz d'eoc'h, Aotrou gouarnner.

(William a zichadenn Jeann : goudeze, ez eont
kuit ho zri).

SEIZVED DIVIZ

JEANN ; WARWICK

WARWICK

Jeann, daoust ha kalet e kavfac'h mervel ?

JEANN

Kalet eo atao mervel : mes mervel ker
yaouank all !

(Neuze, he daoulagad o para var he enebour,
e lavar) :

Ma varvan, Warwick, c'houi eo a vezo
kaoz, c'houi hag eskop Beauvais !

WARWICK

Anzavit oc'h bet kenteliet gant an drouk-
spered, anzavit n'euz netra a vir en histor
ho Sentezed hag o pezo ar vuez.

JEANN

Gevier histor va Zentezed ! Gevier penn
da benn ! Me ! mont da lavaret oun merc'h
an diaoul ! Koll a rit ho penn, Warwick !
E kement tra am euz great, oun bet skleri-
jennet, renet gant Doue hag he Zent ; me
a zo servicherez ar gwir Doue, ha netra
ken.

WARWICK

Miret a rit gant ho sorserez ouz ho sou-
dardet d'en em ganna.

JEANN

Dre va sorserez ne ran ket. Savet oun a
berz Doue, evit taoler ar Zaozon er meaz
euz ar Frans, ha labour vad am euz great.

WARWICK

C'hoari oc'h euz great gant ar c'hleze,
c'houi, eur verc'hig ; ha brema ar c'hleze
ho skoio.

JEANN

Va zoudardet o deuz skoet gant ar c'hleze, ha Doue en deuz roet ar gounit d'ezho ; me, n'em euz morse skuillet an disterra berad goad. Var dachen an emgann, ne rean nemet sevel va banniel ; va c'hleze a jome atao en he feur. C'hoant oc'h euz d'am c'has d'ar maro, ha Doue a roio marteze ar galloud-se d'eoc'h, mes selaouit mad eun dra : ma varvan dre ho taouarn, ec'h en em gavo drouk ganeoc'h, hag en ho korf hag en oc'h ene.

WARWICK

Doue en detiz eta drouk oc'h ar Zaozon ?

JEANN

Drouk pe garantez en deuz Doue oc'h ar Zaozon, ne c'houzon ket ; eun dra ebken a c'houzon : taolet e vezint oll er meaz eur ar Frans ; oll, nemet ar ré a varvo er vro. A benn seiz vloaz ama an oll Saozon a vezo bet kaset d'ar gear.

WARWICK

Goall huel eo ho ker : lavaret a raffet ema galloud Doue etre ho taouarn, ha goulskoude, daoust ha c'houi a c'hoar memez ha bez' emaoc'h e stad a c'hras ?

JEANN

Ma n'emaoun ket e stad a c'hras, Doue d'am lakâtennhan ; m'emaou ebarz, Doue d'her miret d'in. Kaloun ebet ne veffe ken

ankeniet ha va hini, ma c'houffen a berz mad n'emaoun ket e gras Doue, mes ma vijen bet e stad a bec'hed, ne gredan ket en devije Doue digaset he Zentezed d'am c'helenn.

WARWICK

Mantruz eo e komsfac'h en doare-ze, c'houi ken tost d'an ifern prest d'ho lounka.

JEANN

Va Moueziou o deuz lavaret d'in : « Bez pasiant, ne gemer ket re a anken gant da verzerenti, rak dont a ri d'ar Baradoz. »

WARWICK

C'houi, eur zorserez, er Baradoz !

JEANN

Ia, kredi a ran kement o deuz diskleriet d'in va Moueziou ; kredi a ran em Baradoz evel pa vijen dija ebarz.

WARWICK

Kenderc'hel a rit d'ober ho penn fall, it gant an diaoul !

JEANN

Dreizoc'h e varvan, mes pardouni a ran d'eoc'h.

(Warwick a ia kuit).

EIZVED DIVIZ

JEANN; MASSIEU

MASSIEU

Jeann, daoust hag anaout a rit ac'hanon ?

JEANN

Ia, c'houi eo Massieu, sekretour pe skri-
vanier gant va enebourien : great oc'h euz
avechou eur vad benag evidon.

MASSIEU

Jeann. pardounit d'in ar boan am euz
great d'eoc'h beteg hen, hag ar boan a ran
hirio ; rag ankeniusa kelou a c'hell beza
kaset d'eun den a zigasan d'eoc'h.

JEANN

Daoust hag eun dra benag a c'hell beza
kaletoc'h eget ar vuez a renan brema ?

MASSIEU

Bremaik, Jeann, e viot marteze koundao-
net d'ar maro.

JEANN

D'ar maro ! D'am naontek vloaz ! Mes n'eo
ket c'hoaz peurachu va labour. Ha neuze,
mervel... mervel dre zourn ar bourreo !...

(Gouela ra.)

(Goude eur pennad) :

Peur e vezo ?

MASSIEU

Marteze hirio.

JEANN

Hirio ! Ker buan-ze ! Ha perag e vezin
koundaonet ?

MASSIEU

Abalamour m'oc'h euz kemeret a nevez
ho kuiskamant goaz.

JEANN

Mes ne c'hellen ket kaout va dillad all !
Ema ar goardou pe gentoc'h ar vourrevien
o paouez lavaret int bet paet evit kuzat
ouzon va dillad maouez. Mervel !... eb m'am
beffe great an disterra tra fall. Mervel !...

MASSIEU

Bezit fizians, Jeann, lavaret em euz d'eoc'h
marteze, n'em euz ket lavaret e viot koun-
daonet.

JEANN

Bolontez Doue bezet great. Mil bennoz
d'eoc'h, aotrou Massieu, oc'h euz great vad
evidon, p'oc'h euz gellet. Mil bennoz Doue
d'eoc'h. N'oc'h ankounac'hain ket.

MASSIEU

Galvit ho sentezet d'ho sikour.

JEANN

Oh ! bemdez abaouë m'emaou er prizoun-
ma, meur a vech bemdez mar doa red, e

kleven va Moueziou. Pa vezen re ankeniet, re voasket gant an dud a iliz a zo va barnerien, hag a glaske va luia en ho lasou evit plijout d'ar Zaozon, e taoulinen mar gellen hag e lavaren : « va Doue madelezuz, en » henor d'ho Passion Zantel, va c'helennit, » me ho ped, var ar respount a dlean da rei » d'am barnerien. » Neuze eur sklerijen gaer a bare en toull terval-ma. hag e vezen kenteliet. Hag hirio, fizians am euz, n'am dilezint ket : gueletem euz bremaik va Zentezed, klevet em euz ho Moueziou.

MASSIEU

Kenavo, Jeann !

JEANN

Kenavo er baradoz !

(Massieu a ia kuit).

NAVED DIVIZ

JEANN, *he-unan daoulinet* :

Treindet Santel, o pet truez ouzon ; Santez Mari, pedit evidon. Oh ! entent a ran brema petra eo va merzerenti ; kredi a rean beteg hen e oa ar verzerenti-ze an amzer am boa da dremen er prizoun. Siouaz ! Va merzerenti a zo ar maro. Ah, Rouen ! ennout 'ta e tlean mervel, ha pebez maro spountuz ! Entent a ran hirio perag en deuz roet Doue d'in evit va zikour Santez Catha-

rin ha Santez Mac'harit : merzeriet int bet ho diou.

DEKVED DIVIZ

JEANN, WARWICK ; GOARDOU

WARWICK

Goardou, emae var c'hed euz Jeann var ar blasen, amarrit eta he daouarn, ha kasit-hi dirag ar varnerien.

Goude, c'houi a deui ama da renta kount d'in euz a bep tra.

(Eur goard a amarr daouarn Jeann hag ez eont oll kuit, nemet Warwick. Epad ma 'z eont er meaz, e klever) :

Viltans !... Sorserez !... Heretik !...

UNNEKVED DIVIZ

WARWICK, *he-unan, terval he benn* :

Ia, koundaonet eo. Oh ! perag 'ta an den ne gav morse ar guir eürusdet var an douar ? Jeann e doa trec'het hor zoudardet var dachen an emgann : beteg ma 'z eo deuet, hor zoudardet a rea ho mistri var douar Frans ; kerkent ha m'eo deuet, ni eo on deuz te-c'het. Mervel a ranke : mervel a rai. Ha goulskoude, n'oun ket eüruz. En despet d'ar varnerien o deuz resevet kant mil lur evit

ho labour, en despet d'hon oll izin, d'hon oll finesaou, Jeann ne deuz ket kollet he henor. N'on euz ket great d'ezhi lavaret nag eur ger a gounnar, nag eur ger a zizesper. He brud vad a zo chomet ganthi : e leac'h beza dallet, hi eo a zalle gant he c'homzou ar barnerien paet ganeomp. Mes bremaik, pa vezo devet dirag an oll, den ne gredo he difenn, den ne gredo komz anezhi. Barnet ha koundaonet gant eun eskop, ne deuz guir ebet d'he henor : kement hini a zigoro he c'hinou da ober he meuleudi a vezo stlapet er ster. Ia, Jeann d'Arc a vezo devet, ha petra lavaran : e vezo : marteze eo echu al labour-ze, rag lavaret em euz d'ar bourreo : « Grea buan. »

(Guelet a reer ama, mar geller, tost d'an **theatr**, var an adren, Jeann stag ouz eur peul huel, tan didanhi).

DAOUZEKVED DIVIZ

WARWICK ; JOHN

JOHN

Great eo an taol : ema o vervel.

WARWICK

N'oc'h euz kollet nemeur a amzer.

JOHN

Nan, aotrou Komt. Kerkent ha m'oump digoezet var ar blasen, Nicolas Midi en

deuz great da Jeann eur brezegen gaer. Var he lerc'h, an aotrou 'n Eskop Beauvais en deuz komzet ive, ha diskleriet ne c'hell ket an Ilis difenn Jeann. Neuze eo bet koundaonet d'ar maro evel pec'herez, sorserez. Goude beza great eur bedenn verr da Zoue, goude beza goulennet ma ve dalc'het ar groaz dirag he daoulagad, eo savet he-unan var ar bern keuneud, eno eo bet staget ouz eur peul huel ; he gwelet a rit o peurzevi.

WARWICK

Ia, he guelet a ran.

(Prestik goudeze ne veler mui an tan).

JOHN

Tud Rouen o deuz truez ouz Jeann, Cauchon hag ar re all o deuz skuillet daelou ; evidon-me, kerkent ha m'eo kroget an tan, a zo deuet kuit : va c'halon a iea bian. Ah ! setu unan all o tont.

(John Gris a zalud).

TRIZEKVED DIVIZ

WARWICK ; JOHN ; JOHN GRIS

WARWICK

Achu eo, evit mad ?

JOHN GRIS

Ia, aotrou Komt, mes souezuz eo. Lava-

ret em boa d'ar verc'h-se em bije taolet eun horden geuneut en tan, mes pilet oun bet pa dostean, ha goude maro Jeann em euz guelelet he ene o nijal dindan furm eur goulmik venn.

WARWICK

Ec'h euz guelelet ! Ia, kaout a ra d'id beza guelelet.

JOHN GRIS

Aotrou Komt, mad eo va daoulagad. Goulennet em euz digant ar zoudard tosta d'in : « Ha ne velez netra ? » Hag hen en deuz respountet : « Hano Jesus a velan skrivet gant » lizerennou aour azioc'h penn ar zorserez- » se. » Jeann a zo tremenet en eur lavaret : « Jesus. »

WARWICK

Ar zoudard-se en doa evet re a vanneou er mintin-ma.

PEMZEKVED DIVIZ

WARWICK; JOHN GRIS; JOHN;
WILLIAM *a deu en eur zaludi*

WARWICK

Great mad eo bet al labour ?

WILLIAM

Ia, aotrou Komt, devet eo Jeann, devet oll nemet he c'halon. Ar bourreo, p'eo bet

puluc'het ar c'horf a bez, en deuz ejet al ludu gant he forc'h houarn hag en deuz kavet ar galon ruz-beo. Taolet en deuz ar galon e kreiz ar glaou ruz-tan, mes kaer en deuz bet poania, ar galon n'eo ket bet devet ; chom a rea evel beo atao. Spountet, ar bourreo a zo tec'het kuit en eur lavaret : » Devet em euz » eur Zantez. »

WARWICK

Hag ar galon-ze a zo chomet eno ?

WILLIAM

Nan, aotrou Komt ; mevellien ar bourreo o deuz he zaolet er ster gant al ludu a ioa eno.

WARWICK

E guirionez, daoust hag ar zorserez-se, e deuz great kement a zrouk d'eomp epad he buez, a glaskfe c'hoaz hor spounta goude he maro ? Mes perag kemeret aon ? Ludu he eskern a zo eat gant an dour : brud he hano a ielo gant an avel.

(Mont a ra kuit. — John ha John Gris var he lerc'h).

PEMZEKVED DIVIZ

WILLIAM, *he-unan* :

Nan, nan, her c'hredi a ran, hano Jeann d'Arc n'ez ai ket gant an avel. Ker fall hag

ar re all oun bet evithi, siouaz d'in ! mes ne
oa ket eur zorserez. Pedi a rea ker kalou-
nek ama er prizoun, koulz ha var ar blasen,
pa oa an tan oc'h he devi. Ia, divezatoc'h
marteze, pa vezo klevet hano euz ar maro
truezuz-ze, meur a hini a rai evel eskop
Beauvais, a skuillo daelou ; divezatoc'h
marteze, e vezo gellet lavaret evel ar bourreo
hirio : « Jeann d'Arc, devet e Rouen, a zo
» eur zantez. »

KAN DIVEZA

*Mar kerer, e c'heller boda neuze ar botred var
an **theatr** evit ar c'han diveza : e kreiz, Guen-
nole gant banniel Jeann, tu ha tu d'ezhan Lahir
hag ar re all ; an oll en eur ger, nemet Jeann
hag ar Zaozon.*

VAR DON : **Bro goz ma Zadou.**

DISKAN :

Jeann d'Arc ! Skou-er ar Frans kristen,
Roit d'eomp kaloun var an dachen,
'Vit trec'hi hon enebourien.

I

Savet oc'h euz ar Frans, hor bro benniget,
Flastret dindan galloud Saozon milliget ;
Servich Doue da genta, oue ho ker eb ehan :
Ar gounit a roaz d'eoc'h, Jeann.

II

Etouez an drez, ar spern, eo koant al lili,
C'houi guerc'hezik yaouank, pur e Domremy,
Pur ha skedusoc'h c'hoaz mesk ar zoudardet,
A vir ho kurunen bepred.

III

Dre ar Groaz ounp bet prenet gant Jesus,
C'houi peuz prenet ar Frans dre 'r maro skrijuz ;
Chomet kristen dreizoc'h, ra jomo hor bro
Start en he feiz evit ato.

DIVEZ

